

## PROGRAMM AR RUMMAD SEVEL PENNADOÙ E BREZHONEG

### Pal ar staj :

Kemer fiziañs o skrivañ e brezhoneg : kaout plijadur oc'h ober ha reiñ digor d'ar spered krouiñ hep na vefe stobet betek re gant diaezamantoù stag ouzh mestroniñ ar yezh a vefe gant ar re a gemero perzh.

### E-kerzh ar staj :

- e vo kaset poelladennoù berr / c'hoarioù skrivañ evit kaout fiziañs ha gellout eskemm gant tud all war ar pezh a vo savet asambles (penn da benn ar sizhun) ;
- e vo pleustret war ar stil, an doareoù yezh, diwar labourat war aroudennoù eus meur a skrid brezhoneg (danevelloù, romantoù, pezhioù-c'hoari, ...) (e deroù ar sizhun, kentoc'h) ;
- e vo kinniget d'an dud sevel (pe treiñ, ma kav gwelloc'h da dud 'zo) pennadoù hir pe hirroc'h diwar ar stumm a vo diouzh o c'hoant (da skouer, evit ur gazetenn, pe da vezañ lakaet en ur blog, peotramant c'hoazh un tamm danevellig, pe ur sketch, pe un tamm lizher bennak, ...) (en eil hanter eus ar sizhun, kentoc'h).

### Evit kemer perzh er staj-se :

Dav e vo d'ar stajidi bezañ en o aes e brezhoneg, met n'eus ket ezhomm kaout barregezhioù eus an uhelañ : n'eo ket ur staj sevel danevelloù hag a vefe kaset gant skrivagnerien a-vicher. Ur staj brezhoneg eo, kenkoulz hag un digarez da gemer fiziañs pa skriver e brezhoneg, tra ken : degas startijenn ha c'hoant da labourat a-stroll a vo eus ar pouezusañ.

Diouzh ar fazioù stankañ pe ar skoilhoù a-fed yezh a vo lakaet war wel beb ma vo labourer asambles e vo savet war ar prim prantadoù stummañ berr evit kompren penaos kaout an dizober anezho.

Mat e vo d'ar stajidi degas o urzhiataer ganto ma c'hellont, pe un dra bennak da skrivañ (kaier, folennoù, kreionoù du, kreionoù liv, gomennoù, stiloioù, stabilo, blanco), geriadur ha yezhadur, un alc'hwez USB evit gellout mirout o labour.

---

**EVEZHIADENN** : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.